

DOUE HA VA BRO



du Ministère

ETON

PARAISSANT LE SAMEDI!



BUREAUX :

BREST - 4, rue du Château, 4 - BREST
QUIMPER - QUAI DU STÉIR, 12

Les lettres non affranchies sont refusées
Les manuscrits non insérés ne sont pas rendus

PUBLICITÉ

Annonces Judiciaires	(la ligne)	0 fr. 20
Annonces volontaires		0 25
Réclames, en 4 ^e page		0 40
Dernière colonne de la 3 ^e page		0 50

L'Agence Havas, 8, place de la Bourne, reçoit nos annonces à Paris

ch eun
eur dle
devije
hervez
uz dis-
emerez
emi-
derri
prenez
af Pab,
eun abeg
ted, nag
eun tad

ken laosk eo ar brotestanted enn ho lezenn hag an darn vuia euz ar gatoliked ; ha dre ze da zigarez ne jench netra er gont.

Dalc'homp sonj eta ez euz e Frans 50 kwech muioc'h a gatoliked eged a brotestanted hag a iuzevien asambles. E-kenver pehini euz an tri rumm eo a dlee neuze ar c'houarnamant kaout ar brasa damant ?

Fanch. — E-kenver ar gatoliked.

Per. — Ha padal reolenn ar brotestanted eo o deuz klasket Comb hag he genseurted ; hag enn ho lezenn e lavaront d'omp : « C'houi a heuillo ar reolenn-ze ivez evit mont da netra evel ar brotestanted ! »

Fanch. — Mantruz eo !

Per. — Ac'hanta ? kompren a ri neuze perag eo dishevel ama barnedigez ar Pab hag hon eskibien ouz hini ar brotestanted ?

Fanch. — Ia, ia, Per !

Per. — Dalc'h sonj neuze ; hag arabad lavaret ken : « ar pez a zo mad evit ar brotestanted ne dle ket beza eun droug evit ar gatoliked. » Al lezenn a zo bet douget a-enep ar Relijion gatolik, enn he enep hebken, keit ha ma klasker miret da noa-

17
Tudou keiz, araog dimezi,
Karit anezhan, anezhi !
Pa vez karantez er galon,
Gant madelez, furnez guirion.

18
N' vez ket anter-noz an eured,
Buez fall gant an daou bried.
Nag anter-noz, na goude pell,
Na guech ebet betek mervel.

19
Ar garantez, dre ma kosa,
Ia, 'vel ar guin, gwelloc'h-guella.
Ne zeus netra ker c'houek, ker koz,
Evit Doue er baradoz.

KHLEIER

Eur pez labour braz. — Enn Allemagn emaoar o vont da gleuz euz ganol vraz da vont euz ar gear-benn Berlin da Schwedt, ha dre eno zoken d'ar Baltik, rak, ar gear ziveza-man a zo yev an stourmez

c'hoaz : mes diwardro tud ar barrez daz gant ferier ha fil'her, hag ho kuit e berr amzer.
Prizouniet int bet oll.

Penaoz e choumo an ilizou h.
— An ilizou ne vezint ket sarret, em menceau hag ar Briand ; mes ar vel'e c'hellint mont enn-ho nemed galvet gant eun association culturelle.

Eur mear euz ar Puy-de-Dôme, hini cel, Garde-Neuville he hano, eo d'ezhan diskouez d'omp, araog an penaoz e c'hoario potred ar c'houarn hep dale.

Da genta e skrivaz d'an aotr. perso lizer na gallek na saoznek, hag a raf d'an diveza potr saout, evit lavaret d'ezhan eur miz evit goulenenn eur all.

Ar persoun, na petra 'ta ? a reaz skouzard : n'e ket mear Montcel eo e he gaset di, n'e ket hen ken nebeud gaso kuit.

Ar miz a oa tremenet, ha mall e

Son ar briedelez

Ar zon-man e deuz bet ar c'henta euz an daou briz roet gant ar C'hourrier evit **Barzaz-Leon**. François Pelton, euz Lambert, eo en doa he c'haset.

DISKAN

Hep karantez krog er stur,
Dimezi ne d-eo ket fur.

1

Klevit eur zon a zo nevez,
Divarbenn ar briedelez.
Ebat eo d'an dud dimezi
Pa vez karantez leiz o zi.

2

Ebatoc'h c'hoaz da ziu galoun,
Pa vez karantez enn'ho doun.
Ar garantez a lavaran
A vez e kaloun peb-unan.

3

E kaloun paour a pinvidik,
E kaloun leon a sidanik.
Ar briedelez 'zo eur vag
Var mor ar bed stlapet distak.

4

N'e deus d'e c'has na roenv na guel,
Nemet ar mor hag an avel.
N'e deus enn-hi nemet daou dreizer,
Eat hep sellet ouz an amzer.

5

Gant karantez, priejou keiz,
E zeot eaz enn tu all d'an treiz.
M'en em garit, dalc'hit kompez
Bagik skanv ar briedelez.

6

N'ho pezo nep poan o vale
Harpet an eil var egile.
E viot bemdez 'vel daou vugel
Lusket goustad enn o kavel.

7

E vo peb deiz eun deiz nevez,
E vo eun dudi o puez.
E velot an env var o penn
O c'hoarzin, o tridal laouen.

8

E velot enn o kaloun eurus
Eur vouez o kana dudiuz :
N'e deus netra ker mad er bed
Evel ma zeo en em garet.

9

Eun env, er mor, var an douar,
Ne zeus netra ebet na gar.
Ar steredenn 'gar an envou,
Ar bokedik hanv ar prajou.

10

Guell' eo karantez leis an dourn
Eget aour melen leis eur fourn.
An aour melen a vez rannet,
Hag ar garantez ne vez ket.

11

Ar garantez, o klask madou braz,
'Zo klask dimezi ki gant kaz.
Ar garantez zo eur c'hlaouen
'Vel an eol, flamm a laouen.

12

Padout a ra 'vel eur valkenn
A veler e skeud o tremen.
Enn amzer-ma, merc'h fur a koant
E zeus poan o kaout hep arc'hant.

13

'Leac'h eur votez bet er vouillen
Gant kaout madou a gav perc'hen.
Enn amzer-man ar priejou
A vez guerzet er marc'hajou.

14

Guerzet 'vezont 'vel loenet
Staget oc'h ieo 'vel ejennet.
Embannet dre ar c'heleier,
Fred, var dro 'r gear pa ne gaver.

15

Ne deo ket avalc'h 'vit dimezi
Mont d'an iliz da eureuji.
Lammet er vag-ze a zo eaz :
Diez eo avad, diez dont er meaz.

16

Hep karantez, ar vag dioc'htu
A gemer dour dioc'h an daou du.
A gemer dour, a ia d'ar gweled
Var e fenn, gant an daou bried.